CARNETS DE ROUTE D

O me *a* oa un den diwe*zh*at pa oan deut da grediñ Ar gozh gwrac'hed kozh gwechall *a* vije tout o lâret din Diwall eus ar merc'hed koant pa garjen dimeziñ An hini vilañ a gavjen *e* vije ar wellañ din

gwelloc'h e vije din mil gwech bet anavezet ur plac'h koant Na p'am bije eus he ferzh deus ur feunteun tourmant O bezañ bet ur viltañs karget deus ur c'hwez fall Na n'eo ket mat da dorchañ botoù ar merc'hed all

Me n'on ket ha me *a*m *b*o c'hoant da zimeziñ biken Met ma teufe da soñj din eo ret krediñ serten N'in ket da glask ar vilañ *e*vel am *bo*a graet an dro-mañ Unan goant eo ret din ka*ou*t pe chom *a* rin *e*vel on bremañ! Oh j'étais un gars attardé pour avoir cru Les vieilles bonnes femmes qui me disaient toutes autrefois De me méfier des belles filles quand je voudrais me marier. La plus laide que je trouverais serait la meilleure pour moi.

J'aurais mille fois préféré avoir connu une belle fille Quand bien même elle m'aurait causé une fontaine de tourment Que d'avoir eu un laideron malodorant Pas bonne à cirer les chaussures des autres filles!

Je ne sais pas si j'aurai jamais envie de me marier Mais si j'y pense il faut croire assurément Je n'irai pas chercher la plus laide comme cette fois J'en aurai une belle ou je resterai comme je suis maintenant!

Ar merc'hed koant hag ar re vil Les belles filles et les laides (2)

Yves LE GRAET (tad Alberig ar Graet) - Bertu Nesañ - Mantalod - 1980 - (père d'Alberig - Bertu Nesañ - Mantallot - 1980)

Me ho ped paotred yaouank pere o deus c'hoant merc'hed Ne choazit ket un unan goant evit bezañ ho pried

Ne choazit ket un unan goant nag unan gwall faro Kar ar re a lavaran dit a zo kañfantennoù

...

Je vous en prie jeunes gens qui avez envie de filles Ne choisissez pas une belle fille comme épouse,

Ne choisissez pas une belle fille ni une trop fringante Car celles dont je vous parle sont des gaillardes!

...



Pierre Coadou Moulin de Poulloger Prat 1934 (coll. Awel-Dro - Ifig Troadec)